



AR GEVIER



Me am eus gwelet en Pontreo
Eur gazeg kignet, hag hi beo.

Ha hi er park o labourat,
Hag eet he c'hroc'hen d'ar marc'had.

Eun de all 'moa gwelet eur blei,
Gwisket en voulouz hag en zeï,

O vont deus ar prad d'al lanneg,
Gantan eur marc'h hag eur gazeg.

Me am eus gwelet tri borc'hel
O tansal en eur goz skudel.

Dansal a reint brao, magnifik,
Met o flas a oa bihanik.

Me 'meus gwelet eur c'heveleg,
Eur c'horn-butun gantan 'n e veg,

Hag eur gontel gantan 'n e zorn,
O trailhan butun en e gorn.

Gwelet 'meus peder logoden,
Peb a zog bordet war o fenn.

Peb a gleve ouz o c'hoste,
O vont da zerviji 'r roue.

En de all 'moa gwelet eur c'had,
Oa ganti peder votez-koad.

Me 'meus gwelet eun ouenner vla,
Montroulez ganti war he skoa,

Ha Landivijo war he lost,
Ha c'hoaz ec'h ae da heul ar post.

* *
*

Biskoaz meus gwelet kemend-all,
Hag am oa gwelet an deiz-all :
Oh ! ratitou, trala lila,
Oh ! ratitou, t'ra la la.

Ar gousperou da c'houlou-de,
Hag an ofern d'an abardae.

Ha prestik goude ar zermon,
Eur biniou gant ar person.

Hag eur vombard gant ar c'hure,
O son toniou bâl mod neve.

Hag ar c'hloc'her gant diou weren,
A zouge jistr d'ar zonerien.

Pa oan deut 'maez eus an iliz,
Em oa gwelet c'hoaz traou iskiz :

E korn ar vered eur gerc'hei,
War vordig eur be oc'h azei.

War vordig eur be oc'h azei,
Hag eur goukou o kana d'ei.

Ken braoik-all ha ma kane,
Chas ar c'hastel holl a zanse.

War lec'h ar leur-ger p'erruis,
Traou ken estlammus a welis :

Eur yar yaouank eus ar pen-ker,
'Frita krampoez d'eur c'hemener.

Hag eur vleiez o prena per,
Tal eur louarn o werza yer ;

En o c'hichen oa eur winel,
Raza e varo d'eur sparfel.

Hag eur vaoutez tailha lian,
Evit ficha he maont bihan.

Pelloc'h 'welis eur vanden zaout,
Eur parkad kelhien 'vont d'o c'haout.

Hag eur gazez tamoueza bleud,
Hag he c'hazig o tibun neud.

Hag eur logoden gant eur vaz,
O lopeta war choug ar c'haz.

Hag eur gazeg o lac'ha laou ;
Kredit d'in, ne laran ket gaou.

Hag he eubeul etal an tan,
O veska youd da Varijann.

Biskoaz 'meus gwelet kemend-all
Hag am oa gwelet an deiz-all.

Breman, ni ho ped. mignoned,
Mar 'peus bet joa ouz ma c'hlevet,

Reit d'in, mar plij, eur gwennegig,
M'am bo butun fresk em boestig.